

35 988 *Recit 5 7h 1892*

# RECIT TERRUBL

## DIOU PLAC'H SO MET MERZERIET

*6*  
Ebars en Pares Taulé

E MIS MAE DIVEZA *1892*

*La fetsom Combab*  

---

*x*  
VAR UN TON TRIST

Drinet Santel eus an Envou, 8  
Me o ped d'am asista, 7  
Vit ma c'halin e ber gomzou, 8  
Dont breman da ziscleria, 7  
Daou torfet so bet commetet, 8  
Nit ar bloas bars en hor bro, 7  
Pere a laka contristet. 8  
Kalon kement o c'hlevo. 7

Aboue un neubet amzer,  
Ne glever ken sur sioas,  
Nemet komz bars e pep kartier,  
Demeus a torfejou bras,  
Gant ar c'hoant da gavet arc'hant,  
E nem laka kals a dud,  
Allas bars en amzer bresant,  
Crueloc'h vit louenet mud.

Salaouit ma plich bretonet,  
Me o ped a wir galon,  
Ar recit eus a zaou torfet,  
Cometet en hor c'hanton,  
Dezir a meus da ziscleria,  
Dirazoc'h scler pen da ben,  
Torfejou eus horrupla,  
Gret gant daouar eur c'hristen.

O ebars e paros Taulé,  
Diou leo eus kaer Montroulez,  
En deiz varnugent a vis maë,  
E zeus bet tristidigez,  
-Diou plac'h eus a greis ho iec'het,  
Deus ranket soufr ar maro,  
Dre ma so gant an drouk-speret,  
Tud posedet en hor bro.

Sioas intanvez an Tanguy,  
A neus bet seiz taol contel,  
En deiz se ebars en he zi,  
Digant eur barbar kruel,  
A c'hoas kals a tolliou boutou,  
A neus bet roet dezhi,  
Ar plac'h kes deus bet soufransou,  
Ag ouspen eur maro kri. -

Goude ma oa merzeriet,  
Hi so bet bars e bue,  
Un devez anter bretonet,  
Neuze rentas he c'hine,  
Entre daouarn hor mest Santel,  
Roue an oll buissant,  
Laket fin d'he foaniou kruel,  
Kuitet ar bed languisant.

He merc'h so bet lac'het ive,  
Tregont pas demeus an ti,  
Memor a zalc'ho tud Taulé,  
Eus maro Jeannie Tanguy,  
Kement den a deus eur galon,  
Goude ma ve kaledet,  
Vo kargaet a gompasion,  
Pa glefont sur an torfeñ.

Gant eur menn a meurbet pouner,  
He fenn dezhi oa friket,  
He c'hepenn dre nerz ar muntre,  
Onthi pell a oa striket,  
He c'horf a oa var an douar,  
E bord an hent astenet,  
He c'hine gant Jesus d'he c'hloar,  
A gredan so bet galvet.

Ebars e bilajen Braquen,  
Eo cometet an daou grim,  
Ag eno ive kristenien,  
Neuze sur d'ar zul vintin,  
E oa François ar Guyader,  
E vonet da gaerc'het laez,  
Da leac'h ma ie e pep amzer,  
Da di an diou verzerez.

An den man pa oa neur gavet,  
Bars en ti an intavez,  
Ractal e oa chomet mantret,  
A karget eus a druez,  
Ractal e neus bet remerket,  
Penaos intanvez Tanguy,  
E gwirion oa merzeriet,  
Gant eur gontel en he zi.

Da unan he amezeien,  
Neuze neus bet lavaret,  
Dont buan bars e ber termen,  
Kouls ag he tha da velet,  
Daou grim demeus an terrupla,  
Gret gant daouarn eur barbar,  
Kapabl da laket da grena,  
An Env kouls ag an douar.

Peguemet a dristidigez,  
Oa he kalon an dud vad,  
Gwelet corf an diou verzerez,  
Astenet bars en ho goad,  
Ar goad o redec dindan'he,  
Kazi vel ma red an dour,  
Losket gant nep so da Zoue,  
A d'ar bed oll adverzour.

An diou plac'h so bet interet,  
Ebars e beret Taulé,  
A laket gant kals a respet,  
Ho c'horfou a memeus be,  
Ag eno breman e chomfont,  
C'han da devez pirillus,  
Ma rankomp oll renta or c'hont,  
D'or Salver, a d'or Jesus.

Ar justis kouls ag ar polis,  
Eus a gaer a Vontroulez,  
So bet ive epad daou vis,  
E vonet sur alies,  
Da vale tha dre ar c'hontre,  
Sonjal kavet ar muntre,  
Mes enep d'ho holl bolonte,  
E deus kollet ho amzer.

Ar c'hrimou so chomet kuzet,  
Betek vremen er bed man,  
Ar c'hriminel en he pec'het,  
A glefe dont da grena,  
Ben ma ranko aparisa,  
Dirag tribunal Doue,  
Neuze teufer da ziscleria,  
D'an oll he oll fallente.

Pa ne oar vit punisa,  
Breman gant justis ar bed;  
Ebars eun traonien Josaphat,  
Un devez vezo barnet,  
Da vont pad an eternite,  
Da soufr tourmanchou gries,—  
Da veza gret bars e Taulé,  
Nag eur sort falagries.—

Credi ran ive pa glevo,  
Kana breman ar werz man,  
He zaoulagat gle scuil daelou,  
Ag he oad glefe frima, *net sans*  
He galon gle beza karget,  
A c'hlac'har ag a anken,  
O veza bet merzeriet,  
Ep truez diou feumeulen.

Mes allas en amzer bresant,  
So kals a dud bars er bed,  
Kouls tud koz evel tud yaouank,  
So gant safan posedet,  
Ag e teuont e pep amzer,  
D'ober pep sort fallente,  
Enep aviel hor Salver,  
Enep lezennou Doue.

Ne deuan ket da soupsoni,  
Var nikun eus ar c'hartier,  
Mes a wir galon da bedi,  
Va Jesus a va Salver,  
Da rei ar repos eternal.  
Da diou plac'h merzeriet,  
A gras d'ar gristeinien fidel,  
Bars er gloar da nem velet.

Propriété de l'Auteur.

LOUIS LE BRUN.

# AVENTURIOU

36

Daou den yaouank eus a ganton Callac

AR PLAC'H MAVET GANT RAN GALON

13

TON ANAVEZET.

- Ma' mije bet ar furnez, an nevoa Salomon,  
A eur speret da rima' vel ar gwir Siceron,  
A talanchou Josue, Moyez a Cézar,
- Moa composet eur chanson a so leun a c'hla'har.
- Moa composet eur chanson, scrivet gant ma daerou,  
Var sujet eur bromese toret gant gwel deodou,
- Ken' vit avans davantaj, fel din' nem adressi,  
Da Roue ar firmamant so hanvet ar Messy.

Breman eta va' Jesuz, va Salver souveren,  
- Me o ped a wir galon d'exausi ma feden,  
Astennit var ma fluen, ho torn madeleuz,-  
Evit ma c'hellin scriva va buez malevrus.

- Kenta' moa bet an honor da velet va mestres,  
Oa da daouzek a viz maë, e pardon Sant-Serves,  
Eur c'houlouen en he dorn bars er prosision,  
Charmi rez ma santimant, ag ive va c'halon.

- Neur dont d'he c'honsideri, va c'halon a dride,  
- Vel ma reont en envou ar sent ag a elez,  
- A me o vonet neuze gant eur sinser, - *1 galon*  
Da saludi anezhi, dre gomzou saluter.

Me ho salud plac'h yaouank, rouanez ar guenet,  
C'hui rentfe din an enor a ne veritan ket,  
D'antren n'ho compagnenez, me meuz dezir ardant,  
Mar deut breman d'am refus c'hui am grai languisant.

Hi a respontas dime ebars e ber gomzou, -  
Me ne non ket deut aman, da vale henoriou,  
Da roula ma yaouankis, me so deut den yaouank,  
Da heuill ho compagnunez, me so meurbet contant.

- Neuze nimp e vont hon daou, dre wir garante,  
Gant plijadur asables, da zevel amitie,  
Laket e moam hor speret da formi eur c'haden,  
Vit beza victorius var hon enebourien.

Bars an amour mutuel, nimp a oa antreet,  
Dre artificio Venuz hor chaden a momp gret, -  
Hor c'harante a greske da heuil hor secrejou,  
Mes an amzer breskrivet, rez fin d'hor prepojou.

- Araog dont da <sup>micieli</sup>guidadi an eil eus eguile  
Me o c'houlen dingant'hi eur merk a amitie  
Ag hi o lavaret din, va servijer fidel,  
Cetu aze eus va dorn eur mouchouar godel.

A so fleuriet gant amour, bordet gant amitie,  
Model deus ma flijadur, test deus va c'harante,  
- Neuze retorniz d'ar gaer gant eur galon gontant,  
Pa oa ganin em godel mouchouar va dous coant.

Tremen a ren an amzer, gant amour o veva,  
E sonjal em c'harante, Marie Augustina,  
Dre ma neus ket man prinsez na rouanes,  
Da gaout an talanchou vel ma neus va mestres.

- Ag he bisach so henvel eus un aël ar c'haera,  
Ag e c'horf so imach demeus ar re vrava,  
Oll astrou ar firmamant a loar ag steret,  
A golfe ho sclerijen, ma vefe kurunet.

- Eur bloavez omp bet om daou ober amourouset,  
Neuze lakchomp un termen da veza uniset,  
- Da wel Marie anter eost, lakchomp hor santimant  
Da vont dirag ar Verc'hez, da ober hor sermant.

Ebars en ilis Bulat eur plas ar santella,  
Kemeret vit testini hor mam an tenera,  
- E neur antren en ilis stouchomp d'an daoulin,  
Vit ober hor promesse dirag hor mam divin.

- He dornik em hini, unanet horc'halonou  
Gant gwir garante d'an env savet hor pedenou  
Vit goulen digant Marie grasou particulier,  
A digant Roue ar gloar hor mest ag hor Salver.

- Pa moamp gret hor promesse, nimp o tonet er maëz,  
Ag hor c'halonou laouen karget a levez,  
Henvel demeus kaptivet laket n'ho liberte,  
- Goude beza exilet, entro pad ho bue,

Hi neuze a laras din, breman va servijer,  
Eo poent demnin kimiadi, a mont ive d'ar gaer,  
Evit anons d'hor c'herent penaos meump esperans,  
Da antren en union, a d'ober aliens.

O ! Pa oan e kiniadi an eil ous egile,  
- Sonjemp digant hor c'herent, kavet hor liberte,  
Mes tromplet omp bet sioas e n'hor fretantion,  
Roet deus bet demp pikou, da piket hor c'halon.

Pa oan ebars em gwele e kemer ma repos,  
Me o klevet un eostik vardro an anter nos,  
- Pehini lavare din ken fasil dre he iëz,  
Da vestres so den yaouank, bars e tristedigez.

- Evit klevet an eostik ne moa ket ar greden,  
- Mije eur groas ken pouner er bed man da zougen, —  
Coulscoude honas, a oa ma flaneden galet,  
- Lennet dinme eus an env, dre iëz al lapouset.

Neuze oan het o veva, ia ! epad tri devez  
Gant glac'har bras a chagrin e sonjal em mestres,  
Ne oan ket evit repos na debri n'ag eva,  
Kent a mije bet gwelet, Marie Augustina.

-Goude me vont de gwelet, d'an termen asinet,  
A pa welis anezhi me oa ol glac'haret  
An daelou en he daoulagat, he mouez anter troc'het  
Ag hi' vel den maro a bet en he archet.

Allas gant an tourmanchou, he speret oa troublet,  
He bisach gant ar glac'har oa meurbet dislivet,  
-He c'halon a oa mantret, dre nerz an ankeniou,  
Ma teuas da laret din beuzet en he daerou.

-Jean gaës va mui<sup>Karet</sup> ranet, kant eo va c'halon,  
Boë meus klevet va setans, va c'hondaonation,  
Prononcet din gant va zad kruel a dinatur  
-Mui e zaleou ar gwel deod, evit he graouadur.

Dre gomzou malisius a zellou diremet,  
Neus laret din birviken ne vijen uniset,  
Pa n'ellan o posedi, aman var an douar,  
E finiso va bue, breman var an douar.

Cri a vije ar galon a chomje ep gwela,  
Ebars en beret Bulat, de zul ar rosera,  
E welet va mestrezik, teplori var ar he,  
Leac'h ma oa he zadou koz bet galvet gant Doue.

-Allas, kals bras a zaerou a deus eno scuilet,  
Ar pinsin var be he zud, a deus bet rempliset  
> Bars en tranien Josaphat devez ar jujamant,  
Vo ket muioc'h a c'hlac'har, n'ag a zaerou sanglant.

-Vit a oa ganemp on daou, eno e kimiadi,  
Ebars e beret Bulat rankout nem separi,  
-Ar goad en hor goaziet a so deut da frima,  
Ag or c'halonou tener a so deut da ranna. -

> Ben pemzek devez goude, e klevis ar c'helou,  
Penaos e oa va mestres var gwele ar maro,  
Pronons a rez va hano e neur guitad ar bed.  
> Neur laret kenavo Jean, e Pales an Drindret.

Pa eo maro va mestres, va dous, va c'harante,  
Me ielo d'eur ermitach, betek fin va buc,  
Eno me raï penijen betek fin va deiou,  
Esperout c'hoas e gwelet, e pales ar joaiou.

(propriété de l'auteur)

LE BRUN Louis